

372

Ar Valaen sorcet.

(19, suite).

Var ton : Quand Biron .

Ur paotr yaouanc o tîsqi
 Ar sorcerez, ar magi,
 E tîq un divinnour brudet,
 Dre e spiant hac e speret,
 Voa commencet mat
 Dija da lutinet.

(20)

Gant e vestr en d'oa clêvet
 Neur a orêson secret;
 E velet en doa alies
 D conjuri an diablequeuz,
 Ar gormandonet,
 Spêrou ha lutinet.

Ar sorcer côs, un dervez
 Ya da bouvenn var ar muez;
 Sonjal a ras ar scolær
 Gout hac én vouie e vicher:
 Gant comzou latin
 E command d'al lutin.

O trei ous ar valaen
 E corn an tîq, ec'h ordren
 Dezi gant ur zaill d'ar rivier (21)
 Mont da querc'hat dour d'al laouer.
 An oustîll ractal
 A gommang da finval.

Ha monet a droadic-cam,
 Greqi er zaill, hac a lamm
 E garga, ha d'an tîq goude

En discariga, hac adare,
 Ger pront en e roud,
 Heb hean en tra tout.

Ar paotr yaouanc, bezit sur,
 A dride gant plijadur,
 D velet an oustîll chalmet
 Senti gen pront ous e rêget:
 Me zo, emeza,
 Sorcer avialch, bremâ.

An dour el laouer dija
 Voa harp er bord huella:
 Paouez bremâ, me en ordren,
 Erme ar Paotr d'ar valaen;
 List ar saill bremâ,
 Dour avialch zo amâ. (22)

Al lutin coad, goucoude,
 Evel gent a zigasse
 Stang-a-stang dour a zailladou,
 Gen a scuillas dreist ar bordou:
 Chom eta, loën vil,
 Eure an den habil.

Chom eta, bot an ifern!
 Erma 'n dour dreist va ufern;
 Paouez crenn, pe me as orillo.
 Gred ac'hanon, queuz as perzo.
 Hi a ya bepred
 Heb ober van ebéd.

(23) Ar pautr qez, gant e gourach
 A drapas croc en un hach,
 Ha gant un tol en deus troc'het
 Ar Stubelen gen aheurtet;
 Mes e joa, allas!
 Nebeudic a badas.

O tra espis! an daou benn
 emeus ar c'hoz valaen
 A zo et o daou adare,
 Coulz an eil evel equile
 Da vad d'o labour,
 Erit qerc'hat dour.

Doublet al labourerien,
 Dre se e toubl an eyen;
 Ar pautr-qez a gommanç nec'hi,

Poent eo tec'hi quit, pe veuzi.
 (24) Ar mestr, dre vonheur,
 A deuas var an heur.

Ordren a ra d'al lutin
 Distrey da gorn ar quequin,
 ha d'ar pautr: ac'hanta, marmous!
 Costant oude eus ar c'hlabous
 Ac'h eus bet savet
 Dre da benn calet?

Nes qet ret beza habil
 Vit digass sperejou vil,
 Vit o laqat da fistoula;
 Mes o c'hontraign da heana:
 Gementec, pautr-qez,
 Zo meurbed diez.

fin.

Dés. De Goesbriand.

(Vol. IV, p. 19-24.)
 14 str. numérotées.